

CHANSON NEVEZ AR MERHÉTAER

GROET GANT EUN DEN DEUS AR VICHER

Var ton : PÉBEUS QUÉLOU O VA DOÛÉ



1^{er} Couplet.

Abaoù an deves miligoet ma chances dor matu genta
Cavet eur hoantaden avalou neus mert poanion er bedma
Martolod Escop dévêzour peb hini neus e vicher
Mes neus quec crioñ planéden vit hini ar Merhétaer.

2^e Couplet.

Mill drubuil mill dispiljadur reñq bemdé da anduri
Né al quec poanès un instant ato e déveus souroi
Evel ar had er raden né gousq moréc met anter
Pa vé ed an oll da gousquet et red boas ar Merhétaer.

3^e Couplet.

Guel zéo béa destomet chadénét vel eur hy
Laquet da zivoal ar groagué en rouantilez an Torqy
Béza broudet vel eun azen samet vel eur marh glaouër
Argasset evel ar bleizi évit béza Merhétaer.

4^e Couplet.

Né deus nac énor na profit da houit barz er stad
Cousouodé a ben e hober eo red béza délicad
Cavet eun téod délibéret eur lagat lem a zéder
Pacientet eur genviéden évit béza Merhétaer.

5^e Couplet.

Red eo dézan vel an targas guelot an dévalijen
Béza sioal vel ar louarn mœur vel eur zilien
Calonek vel eur lion crapad en guis deur guinver
Beza sean evel eun évryez évit béza guir Merhétaer.

6^e Couplet.

Béza joaus a zéder chérissa ar vugalé
Laret int patrom ho zad vit plioù dar gragué
Gout trémen brao deus ar té goz silaou mad o sollo caër
Pés dézo banahou lipach évit beza guir Merhétaer.

7^e Couplet.

cavet diouscouarn deus ar squitra levei voa pes neusclévet
Divoal mad da nem vrambarçal deus madeles ar merhet
Gout an tu da liva guévier nac a vé avéchoù selair
Tonet vé noz da gréis-té évit beza guir Merhétaer.

8^e Couplet.

Clevet propojou dipitus béza boutet en eojou
Insultet gant cos rampennet réi a récécou banahou
Anduri meurbet aliès ar glao an erh an tomder
Foltra e gorf ac e zillad stard éo béza Merhétaer.

9^e Couplet.

Miret an nor a vouigourat miret ar bi da barzal
Monet en ty dre ar prenest mèmeus dre ar chiminal
Crapat dreist ar moguério gant lampad dreist ar guicher
Balé sioal ével ar logot évit béza guir Merhétaer.

10^e Couplet.

Mestronia e zantimant derhel claz voar sonjou
Hoarzin ganteaon en a galon a destom pis e zaélou
Quémér ervé mai red dezan eur stum souret pé zéder
En nem divoazan da ruya vit beza guir Merhétaer.

11^e Couplet.

Mes ar starda deus ar vicher eo gonid ar merhet
Quizidikoh marbadouaes neus quec voar ar bed
Deus e divis e zantimant da bep hini reñq hober
Leun demens a sonjou évit beza guir Merhétaer.

12^e Couplet.

Vit dont aben deus eur seures reñqer ober eur gloven
Vit gonit eun éférez gloathi dei e horzaillen
Dar merhet a gar e nem benta ri eur hoef eun davanger
Laret amplou évit justoh évit beza guir Merhétaer.

13^e Couplet.

Goudal laquat e oll galloud fopetta e liardigou
Cavat fourçac a néhamant cabouillad dre ar poullou
E vanq aliès e delioa et feu divragou dar guer
Pinous vel eur hoq diblunet stard eo beza Merhétaer.

14^e Couplet.

Heuzi ran pa gomprenan peguemet a drubaillou
Ar vizer ac ar boan speret a sauir ar paourkes pitou
Mes ar merhet zo quantentus a va balon quen tener
Ma zon en despet dam baro contraign da heul ar vicher.

J. Brava

CHANSON NEVEZ AN DOGAN CONTANT

Var an ton : D'HOBBER AR BAL.

1^{er} Couplet.

Peguen diot eo ar voazet
Pere zo nos de trubuillet
O hévésad ô friéjou
Gant son da zougen ar herniou
Rac evrussa den a valé
E zeo an dogan voar ma fé.

2^e Couplet.

Eur vreg fidel zo peur vua
O scandalat pe o vouza
O taskagnat e hi ac e has
He mates petramant e goas
Ya evrussa den a valé
E zeo an dogan voar ma fé.

3^e Couplet.

Control dézi greg eun dogan
A zo dinoaz evel eun noan
Grayo he goas vel ma garo
Biquen coms rébéch na glévo
Ya evrussa den a valé
E zeo eun dogan voar ma fé.

4^e Couplet.

An oll a zo dézan mignon
Ac ar chéou deus ar hanlon
Banabo pes a gar da lonqa
Hep ma renq james o féa
Ya evrussa den a valé
E zeo an dogan voar ma fé.

5^e Couplet.

Da vouët Mikel ma nal quet péa
Na neus quet affer da nem jéna
Termen a nevo pez a garo
Pa ielfant gavet au autro
Ya evrussa den a valé
E zeo an dogan voar ma fé.

6^e Couplet.

Pa vo tom a brao an amzer
Na vezo ket dalhet er guer
Gant e vreg e vo aliet
Da bourmen esit e yéhet
Ya evrussa den a valé
E zeo an dogan voar ma fé.

7^e Couplet.

Gant ne erruo ket re abred
Laouen e vézo diguemeret.
E goan prest he a gavo
Ae e vélé tom avechou
Ya evrussa den a valé
E zeo an dogan voa ma fé.

8^e Couplet.

Mar chang de itron guilloudi
E nem guinig ar gompiri
Ac an oll a goa ar buguel
Deus e dad pim patroni hanvel
Ya evrussa den a valé
E zeo an dogan voar ma fé.

9^e Couplet.

Bugalé neus a beb sort
A ré don a re dort
Re vrum re du hep cavet ar boan
Da ober ane é unan
Ya evrussa den a valé
E zeo an dogan voar ma fé.

10^e Couplet.

Oll tud e di ac e bried
Mar queret erédi zo penit
Voar an ton vras a la pa pa.
Ac e diegués mem-us tra
Ya evrussa den a valé
E zeo an dogan voar ma fé.

11^e Couplet.

Mar neus proces gant eure.
Er justic ne gollo morcé
Atao hep mar en ho ar lanq
Pa yelo lantec er valanq.
Ya evrussa den a valé
E zeo an dogan voar ma fé.

12^e Couplet.

Diboanuis ral e zeo ar stad
Neus nemet serri e raoulagat
Mont er mes eur vech an amzer
Cana dre ma tosia dar guer
Ya evrussa den a valé
E zeo an dogan voar ma fé.

13^e Couplet.

Evit guir an oll dogan.t
Na nint ket quer coulz lodennet.
Mes pa défusi nemet an auter
O hondition zo hoas kaër
Ya evrussa den a valé
E zeo an dogan voar ma fé.

14^e Couplet.

Evidom me tanfoultr biquen.
Na eureujin eur feumelen
Ma ne dou din dirac testo
E vin Cornice evel eur haro
Ya evrussa den a valé
E zeo an dogan voar ma fé.

REGIMENT AR MERC'HET YAOUANK

VAR EUN TON GALLEC.

1^{er} Couplet.

Breman me meus clevet,
Vo gret eur regiment,
Ag enn'hi vo choaset,
An oll verc'h et vaillant,
Da vont d'ober bresel,
Var an ennemi,
Betek vo red mervel,
Vefont fidel bepret.

Discan

Passeit merc'h et vaillant,
Breman eur bragou ru,
Da vont da regiment, (bis)
Vefet galvez dustu.

2^e Couplet.

En plaç ho robennou,
Danvez deus ar c'haera,
C'hui a po eur bragou,
Deus meser ar grossa,
En dro d'ho corfou,
C'hui po centurennou,
Ho taoulagat lizrin,
Oute neuze villo.

3^e Couplet.

Ho pleo hir a pentet,
En demeselet coant
Breman a vo troc'h et,
Vel guir soudart vaillant,
Ag en lec'h ho coufou,
C'hui po casquetennou,
O deo cocardennou,
Ag ive eur ponpon.

4^e Couplet.

En plaç ho potinou-
C'hui po eur boutou gros,
Vit heuil an armeou,
Couls en de vel en nos,
Evit en em c'holo,

A po eur gapoten,
Onnes vad deo'h rayo
Pa vo an amzer yen.

5^e Couplet.

D'eus ar merc'h et coanta,
Certen e vo choaset,
Er c'hargon huella,
A da gabinet,
Ar re vo disket mad,
A vo er burayou,
Evo vefont erfod,
O c'heuil an armeou.

6^e Couplet.

Ar merc'h et teo a lard,
Vo er gaviliri.
Ag an oel verc'h et stard,
Vo en arilliri,
Vit galloud remui,
Ar pesiou canolio,
D'ober d'an enemi,
Cals deus ho boutlijou.

7^e Couplet.

Ag ar broderezet,
Vo er voltigerfen,
Ar guemenerezet,
A vo bars e linen,
Er chasserien var droad,
Vo ar merc'h et a gamp,
Blamour in delikat
Ag eur wez elokant.

8^e Couplet.

Da vont en hussardet,
Ar guemenerezet,
Ebars en dragonet,
Vo ar quiguerezet,
Merc'h et ar pinsoniou,
A vo er soavet,
Er butun so kelou,
Vont infirmierzet.

9^e Couplet.

En infantiri marin,
Ar baperezel,
Er c'hoiseil diciplin,
Ar re deo meritet,
Da vont er saperien,
Ar merc'h et terrupia,
Evel deus archerien,
A vo er pen kenta.

10^e Couplet.

Penn a regimanchou,
Breman e vo laket,
Gant an taboulinou,
Ar guir everezet,
Ag ar stamerezet,
A vo er c'hisironiou,
Dre m'in corfou ezet,
Eo penn d'eus an troupou.

11^e Couplet.

Vit zon ar musikou,
Ar gram-poczerzet,
O c'heuil an armeou,
A vo brao da welet,
Ag ao ostizezet,
Gant ho ardou malin,
A vo cantinierzet,
A werzo door vit guin.

12^e Couplet.

Cetu aze merc'h et,
Evidoc'h eur c'helou,
Cals ac'hanoc'h me gred,
A vo trist ho ginou.
Pa vo ret d'ee'h monet,
Do huil ho patailion,
Bezit fidel bepret,
Evit an nation.

— FIN —

Chanson nevez daou Den yaouank deus a gaer Montroulez

Var eun ton Gallec.

Ar Goaz.

Bonjour va doue, va c'harante,
Deut hon gant gwir humilite (bis)
Da laret did kenavo
Hon deut aman, hon deut aman
Da servicha an drapo
Mont a rankan breman.

Ar Plac'h.

Oh ! Louis, va muta karet,
Mervel a rin gant poan speret,
Assembles ganit breman,
Me a ielo, me a ielo,
Birviken did ne vankan,
Beteg eur ar maro.

Ar Goaz

Oh ! Marivon va douisk coant
Te ne deui ket d'ar regiment,
Cals re eus a dourmanchon,
Zo er brezel, so er brezel,
Bars en toez ar souffransou,
E teules da vervel.

Ar Plac'h

Ma vefe red din brezelli,
 Me rofe plom d'an ennemi,
 Me ziscoelfet ma c'hourrach
 En kreis an tan, en kreis au tan
 Vin ket plac'h' treitour na lach
 Da denna'r Prussian.

Ar Goaz

Va mestres ker, an kreis an tan,
 Evit eur plac'h so re a boan,
 A gant trous ar c'hanollou,
 Teulez bouzar, teulez bouzar,
 A gant ners ar mitrailou,
 E ewefes d'an douar.

Ar Plac'h

Ma ne c'han da vrezelli,
 Da rentia fas d'an ennemi,
 Me a vo cantinijères,
 Er regiment, er regiment,
 Me ranko mont ganet
 Evel gwir plac'h vaillant.

Ar Goaz

Neuze ta va douc Marivon,
 Quitefomp on daou or c'hanton,
 Ben eun neubeetik amzer
 Gant gras Doue, gant gras Doue
 Nin a retorno d'ar gaer.
 D'or bro a d'or c'hontre.

Partiet int d'ar regiment
 O daou gant eur galon gontant,
 Da servicha an drapo,
 Int partiet, in partiet,
 A betek eur a maro,
 Vefont fidel bapret.

Cetu aze, va mignonet,
 Daou den en em garie parfet
 Oh ia, bars an honestis,
 A barfetet, a barfetet,
 Gret evelthe, yaouankis,
 Bezit fidel, bapret.

— FIN —

EUN DEMEZI GRET GANT AR VAM

Var ton : ROSETTE.

Ar Vam

Eru eo ar moment,
 Va merc'h, ret eo dimezi {bis
 A da sonjal breman,
 Petra peus da ober,
 Da guitat a renkan,
 Ag ar bed dilezer

Ar Verch

Va mam ne gomzit
 Din c'hoas deus a zimezi {bis
 Rag yaouankik hon c'hoas,
 Da vont da ren ar bed,
 Ne meus nemet c'hwezek vloas,
 Demezi na rin ket.

Ar Vam

Va merc'h, zent diouzin {bis
 Rog ma quittan ar bed,
 Gant son em goude
 E neur gafes tromplet.
 Ag ar rest ar vue
 Malhevrus var ar bed.

Ar Verch

C'hui ne noç'h ket prest c'hoas {bis
 Va mam da zont dam c'huitat
 Ben neubeut blaveziou
 Vin muioc'h avanset
 A ben fin ho teio,
 Me a mo ma choas gret.

Ar Vam

Va merc'h, eun den yaouank {bis
 A zo demeus da c'houlenn
 A zo den a zoars,
 Hervez ma seblant din,
 A den a galite,
 Kemer n'hean hardi.

Ar Verch

Va mam, en ho cosni {bis
 Ne glean ket ho refus ;
 Ma ran eur parti fall,
 Neur glem na rin biken
 Mez c'hui deut da ziouza
 Ne pe goude anken.

Ar Vam

Va merc'h, me en assur {bis
 Deus ar pez a meus laret
 Gant heuz vi contant,
 Tre ma vi ver ar bed ;
 Dimez hep nec'hamant,
 Bara did vanko ket.

An Dimezi

Cetu ta dimezet
 Ar plac'hik gant he mam {bis
 D'an oad a c'hwezek vloas,
 Da vont da roull' ar bed,
 A gould petra re c'hoas,
 Allas ! ne ouie ket,

Ar Blijadur

Eur pennad a zint bet {bis
 O veva gant plijadur,
 Siouas an evrusted,
 Er bed neo ket padus,
 Rag homan e deuz bet
 Eun den gwel dangerus.

An Dizesper

Ouspenn, meo, divalve {bis
 Eo, sur ive bamboocher
 An arc'hant a c'houne
 Entro pad ar ziron,
 Va lonkel en eun de
 Ag he vreg chom da yaou.

Ar gwel Vue

Pa neur gav c'hoas er gaer, {bis
 E comans d'ober bue
 Tolet ha distolet,
 Alies bazateet,
 Cetu ta ar vue
 Zo entre daou bried.

Ar vam Dezolet

He mam, pa deuz gwelot {bis
 Ar vue voa entreze
 A zo bet dezolet,
 O veltet he dao gret
 Malheur he merc'h caret,
 Tre vije var ar bed.

Avis

C'hui tadou ha mamou, {bis
 Ne ret ket evel homan
 Ne deut ket da bressi
 Dimez ho pugale
 Gant soun, ewelthi,
 O pefe keuz goude.

Lezit ho pugale {bis
 Ho eun d'ober ho choas,
 Pa eo int rank usa,
 Eo just d'he choas ive,
 Ma ne larit netra,
 Vefet divlam goude.

— FIN —